


Breman 8, ru HOICHE 35000 ROAZON

12 lvs

bremañ

Niv. 77 C'HWEVRER 1988



MAEZIOU

AL "LIBERALISM"

KLENVED MARVEL AL LABOUR ZOUAR

KORN AL LIZHIRI

ment automatique"). Arabat an-kouaat e vez ret dalc'hmat d' hon hendadoù bezañ kalonek ha brokus war an dachenn emgarn.

Per Mayer-Danteg
Sekretour ar C'huzul skoazel
evit krouidigezh ur skol Diskan
e Montroulez.
(18 straed Sant Charlez-29210)

O Lem ur pennad-skrid a-
divout an ao-Proinsiad Mac Aon-
ghusa e Carn (niv 59), on bet
digaset da soñj en un dra heñ-
vel zo bet c'hoarvezet e Breizh

War geñ ul lizher digant
ma mignonez, e oa skrivet, "Le
facteur ne veut plus que les a-
dresses soient écrites en bre-
ton car elles se perdent, et
ils confondent Plouaret avec
Plancoët..." ! Se 'zo souezhus-
tre, rak daoust ma 'mañ Ploua-
red ha Plangoad er memes depart-
tamant, ne neuit ket ar memes
niverennoù post-22400 ha 22130-
N'om ket ivez penaos e vez
meket Plouared ha Plangoad ;
n'int ket heñvel, tamm 'bet !
An holl draoù-mañ 'so estonoc'h
c'hoazh pepdir eo'h anavezad
d'ouger-lizher, ha goñt a ran e
oar brezhoneg-brezhoneger e !

Daoust ma n'eo ket heñvel
reoladurioù an div yezh (Iwer-
zhoneg ha brezhoneg) en o bro-
ioù (mod ofisiel da nebeutañ !)
pediñ a ran an holl a skrid da
v-Breizh da implijout netra ne-
met brezhoneg war ar golotoù.

Martez bezañ un dra vi-
han a seblant ar gudenn-mañ,met
dre draoù bihan koulskoude ha
dre draoù bras vez gwasket hor
yezhoù hag hor sevenadur kel-
tiek. 'Vel e vez laret e Kembre
'Mas rhybeth bach yn poeni
pobh !' -Unontez etrezomp evit
flastrañ gouarnamantoù impala-
rel !-

Robert Baxter (Bro-55z)

Kas a ran deoc'h ma adko-
manant evit ar bloavezh. Dre
vras, e kavan plijus atum ha
danvez ar gelaouenn. Laouen on
bet o welet e "Bremañ" nevez zo
savboent disheñvel pe enebet
zoken, war greden evel heñvel an
doare yezh, al live yezh a ran-
ker ober ganto er gelaouenn. A-
tahinet on bet ma-unan a-wechoù
gant ar brezhoneg briahepoble
a vez lennet dindan bliuenn un
nabed eus ho kenlabouerien
(ar atum "ba" arveret dre
skrid da skouer). Hogen ar pep

pouezusañ eo a c'hellje pep
ni kinnig e breder.

(...) E niverenn dis-
zhañ "Carn" kelaouenn d'ar
ar C'hevre Keltiek, ez eus bet
embannet ur pennad sinet gant
a zo an titl anezhañ "Anything
new in Paris ?". Ar pennad-
am boa skrivet e brezhoneg da
gentañ, met troet eo bet evit
an embann, rak, sañset, ne vez
embannet e "Carn" tra ebet e
brezhoneg diwar-benn ar Vre-
toned. Met, setu, ur fazi 'ho
em silet en droidigezh, ha dre
ma 'z eo bet rebechet c'hoazh
gant meur a hini endeo ar pe-
ne felle ket din skrivañ, e k-
van gwelloc'h reishaat ha rei-
saat an traoù hep gortoz ma
teuto er-maez niverenn gentañ
"Carn" e-lec'h e vo embannet un
"erratum", forsh penaos. Dre ma
teu er-maez aliesoc'h "Bremañ",
ha dre ma vez lennet gant for-
zhig tud memestra, em eus sot-
jet ennañ (pe emni, ma komzer
eus ar gelaouenn...).

(...) E deoù ar pennad
e lavaren e oa stad emon o we-
let penaos e oa muioc'h a obe-
riantiz e-touez Brezhonegerien
Bariz eget e-touez Bretoned
c'hallekaet Paris. Skouerioù
niverus a roen a-hed ar pennad.
Met, e-lec'h komz eus "Bretoned
c'hallekaet Paris", e vo ar-
er pennad saoznek eus "Our
Frenchiefied countrymen back in
Brittany". Ne fellet ket din
eveljust tagañ e mod ebet ar
Vretoned o chom e Breizh, pe
Brezhonegerien pe Gallegerien
e vejent. Ne oa ket em soñj re-
bech tra ebet ouzh Breizh-Iwer-
liz, da skouer, a zo en o souez-
tud oberiant-mat ha brogagour-
rien a-soare. An holl ac'hanomp
a anavez skouerioù niverus eus
hevelep tud.

Ma 'z eus tud e Breizh o
deus soñjet e oan bet trelata-
mik gant aer kontammet kêrbenn
ar Stad C'hall -gwir eo, tost
da zaoz voaz so dija emon o
chom emni-, ra vint dizoaniet.
Diotachou a c'hoarvez gant lar-
varet pe skrivañ zoken, evel
gant ar holl ac'hanomp, 'm eus
aon, met an taol-mañ e vijen
aet un tammig re bell ganti...
ma ne vije bet fazi ebet.

Trugarez en a-raok evit
embann al lizher-mañ. A wir gar-
lon ganeoc'h.

Gwenael Emelyanoff

GOUEL KARAEZ

19/20 A VIZ MEURZH

KARAEZ 87



GOUEL BROADEL AR BREZHONEG

E n ul lec'h brasoc'h eget
hini warlene e vo Gouel
ar "Brezhoneg, Yezh Ofi-
siel e Breizh", pa vo dalc'het
e-pad daou zvezh e Sal Vras ar
Sportoù e KARAEZ. Muioc'h a
lec'h a vo gant an arvesterien,
an danserien hag... ar varc'ha-
dourien.

==== KEVREDIGEZHIOU =====

Muioc'h a gevredigezhioù
a zeuy da zispakañ standoù er
bloaz-mañ. Gwelet e vo strolla-
doù politikel ha sevenadurel a-
gevret gant kevredigezhioù is-
torerien, gourenerien, kelen-
terien, mignoned an natur, ha
gant kenwerzhourien a labour pe
a vrud o zraoù dre ar brezho-
neg.

Ur brezhoneger da vihanañ
a vo digant pep stal ha goulnnet
dout gant penelloù (divyezhek
da vihanañ) o tisplegañ o obe-
rezh.

DEVEZH AR YEZHOU GWASKET
EN EUROPA

Tu zo da rakprenañ bilhe-
doù : 60 lur e vo neuze evit 2
zvezh e-lec'h 70 lur (25 lur ar
evit ar FEST NOZ ha 45 evit ar
SULVEZH).

==== BRUDEREZH =====

Evit ma raio berzh ar
GOUEL e c'houlenner digant an
holl brudañ ar gouel muiañ ma
c'hallont. Da skouzañ e
c'hall an holl gevredigezhioù
kas kemennadennoù d'ar c'haze-
tennoù, d'ar skingomz ha d'ar
skinnel da c'hervel an dud da
vont da Garaez. Ha mar fell de-
oc'h kaout skritelloù e c'hall-
lit skrivañ da : EGIN, straed
La tour d'Auvergne 29270 KARAEZ

PROSEZIOU LIVERIEN

D'acu brosez a zo bet abaoe
ur miz, unan e Roazhon,
egile e Brest. DIDAMALLET
-Dirak Lezarn Engalv Roazhon
e oa bet Herve ar Beg d'an 12
a viz Genver, a-enep da glemm
Kuzul Aodoù an Hanternoz a
c'houlenne digantañ 18 309 lur
evit naetañ panelloù mastare.
Goude m'en doa diskleriet e gal-
-leg e youl da gomz brezhoneg
ne oa ket bet lezet Herve d'o-
ber. Ur sizhun goude e voe em-
bannet ar varn : didamallet ar
paotr en abeg d'ur fazi prose-
zadur. Hag ur c'horfad konnar
gant P.Y. Tremel, "mignon" bras
SAB.


KEUZIET

"Ar paotr yaouank a Blou-
zeniel, evel ma lar ar c'haze-
tennoù, a oa bet tapet o tuañ
panelloù gant an archerien e
miz Mae diwezhañ an deus bet
nezet 1000 lur a dell gastiz
gant ar barner, goude m'en doa
diskleriet ne oa ket a-du ken
gant ar seurt labour-mez, ken
ez eus bet tavet war e anv gant
ar c'hazetennoù.

Yann Lesklidri

"GARDES A VUE"

MIZ GENVER



Gant an toullard harzadenou 'zo bet kaset da benn un nebeut eurvezhoù war-leroh tarzadennoù an A.R.B.; o deus diskouezet Paotred Mari Robin, ur wech ouzhpenn, o am-partiz hag o efedusted. Dres ar pezh en deus c'hoant Pasqua hag e vagad harozed sankañ e penn an dud (gant skoazell ar c'hazetennoù, ar radioioù hag ar chadennoù skinwel). Soñjit 'ta, ken tost emomp ouzh ar mouezhiadegoù ! Anat eo ar re gablus a zo bet harzet.

Diwar-benn an doareoù implijet pe an digarezioù roet e- vit kas an "derroristeed" d'an toull, netra, pe gwall nebeut a dra... nemet ez int izilli, e- vit lod anezho, eus ar strollad "EMGANN", pe "militanted". (tud dañjerus, kea ?).

Paket on bet, me, d'ar Yaou da noz, p'edon o ruzañ va botou dre straedoù Roazon, o vont da zebriñ koan. Da 7 eur 35 dik (dalc'het 'm eus soñj mat), setu me oa vont e-biou d'ur c'harr, gwall nervernek an dud en-dro dezhañ, daou benn anavezet ganin en o zouez. (Ar re all 'oa fliked. Gwa din !... Dav din lavaret n'edo ket o gwiskamant "hengounel" ganto war o c'hein). Setu e tostais outo ken dinec'h ha tra :

- Petra ... ?(*)
- Sell ! Paket on bet gant ar fliked !(*)
- (...)

- Eh ! Toi ! Qu'est-ce qu'il t'as dit ? eme un archer ou-zhin. ...Hag... Hop !... Paket gant ar re all !

"Dalc'het war evezh" on bet evel-se e-pad daou zervezh ha div nozvezh, nemet evit bezañ graet gant ar brezhoneg (anzavet eo bet gant an archer en doa savet ar P.V., nec'het an tamm anezhañ, o klask gant peseurt digarez en dije gellet ober war ar paper. "Pour le bon déroulement de l'enquête" a voe lakaet gantañ a-benn ar fin)...

Anat deoc'h, ne dremen ket re vuan an amzer en ur gell gwenn-kann ar speuriniere anezhi, yen, goulouet dibaouez, enni ur flaez gouezet da dreuziñ nav moger, ha bevennet gant ur skaoñ strizh ha kalet evit gourvez. (Ne lavarin ket evit kousket, rak ne veze den evit menel kousket en ul lec'h a seurt-se, ...pa ne zeue ket un istrogell bennak da skeiñ ouzh an nor). Evel ouzh ar re all, eo bet nac'het ouzhin pellgomz, 'pezh a gave din a veze aotreet koulskoude (sañset). Hag ouzhpenn-se, e veze tennet, diwar an nebeut gwenneien 'oa ganeomp priz ar "boued".

Betek mont da furchal em zi int bet (matarasenn, podlastez...), ha me hualet, di-c'houriz ha dilas... Kit da wellet da belec'h em bije gellet mont evel-se ! Ha setu int o tistreiñ d'ur gêr, ganto ur sac'h-beajiñ, ur re votou, e

ken kas e vije bet roullou poultr, plastik, pe un danvez tarz bennak.

Goulenataet eo bet an doare "terrorist" a oa ac'haron peder pe bemp gwech... "Quah, on commence par apprendre le breton, et on finit anti-malgré-aire !" Kompren a rit ?

"Et la Section de Cellique, une école pour les indépendantistes et les terroristes". Gouzout a raen e oa strizh a-walc'h o spered, met ouzhpenn-se int chomet war-lerc'h ! A-benn peur 'ta e vo harzet kement "Abjean" pe "Abgrall" 'zo e Breizh war zigarez e rank kaout darempredoù gant "Abdallah" ...? Ne gav ket deoc'h, chef ?

Ha goude pevar dervazh, setu dieubet ar re ziwzhañ ; anat deoc'h, hep an disterañ keuz digant paotred o zogoù, ha dreist-holl hep an disterañ ne- neg, koulz lavaret er c'hazetennoù... N'emañ ket Paotred Pasqua o vont d'anzav o deus pezh a vije bet "reizh" koulskoude, dreist-holl e-keñver ar strollad "EMGANN" a zo outañ dreist-holl eo bet klasket ober gaoù en afer-se.

Un torfed eo 'ta kout brezhoneg er straed, pe kaout menozioù "breizhek". (...Erfin, netra nevez...).


Gwenole Bihanic

(*) e brezhoneg en destenn.



LANV DU

LOUSTONI ADARRE




Nam eus ket c'hoant ez ad-krögfe" a glevet ur bugel miz paset pa oa anv eus prosez Amoco. N'en doa ket soñj re vat eus reuz an Amoco Cadiz sur a-walc'h met tud all koshaoc'h o doa dalc'het koun re vat ha den n'en dije soñj d'ar c'houliz- se e vije deut en-dro al loustoni war hon addoù ker fonnus war-lerc'h.

Gwir eo ne oa ket bet gwelet abaoe pell 'zo un avel ken rust hag ar bloaz-mañ. E dibenn sizhun diwezhañ miz Genver 'ta e tiskarge al lestr eoul-maen Amazone un 2100 bennak a don- nennou mazout, 2100 tonenn hep- ken a zo bet tud da lenn war an 3200 tonenn a oa en he bourzh.

Netra da welet gant peñse an Amoco Cadiz 'ta. Saotret eo bet an addoù eus Bro-Dreger da Benmaro'h koulskoude ! Ma ne oa ket ken fall an traoù evel ma oant bet dek vloaz 'zo ne oa ket heñvel kennebeut emzalc'h ar Vretoned. Netra da velet d'ar c'henskoazell a oa bet zhiou keñje tud 'zo evit gal- veit reiñ an darn war an addoù. Gwir n'eus ket bet goulenet kement-all gant parrez ebet.

Ret eo anzav er eus bet tapet skiant-prenet gant ar Vretoned, diwar o c'houst gwir eo. Adalek ar lañ a viz C'hwe- vrer e oa bet galvet ur priz- acher evit gwelet an traoù war an dachenn ha kregiñ d'ober ar c'houtou. An dra-mañ a rae diouer da vare prosez Amoco. Kompagnunezh an Amazone 'zo bet lakaet da zigeriñ ur gont 18 milion e Brest da zigoll e- vit ar mizou. 70 milion a oa gant Amoco evit ur reuz dek gwech brasoc'h. Un enklask 'zo bet digoret diouhtu gant hol- landiz ken kizidik hag ar vre- toned ouzh ar gudenn. Div bla- kenn gelc'hiek stag ouzh ar



pont gant teir biñs a zo kaoz, laset int bet kuit gant an ton- nou. Aes eo krediñ ar pezh a vije c'hoarvezet ma vije bet kollet an 3200 tonenn a oa er vatimant !

Ar gudenn a zo gouzout piv a baeo bremañ ! 2 vilion sikour en deus lakaet ar stad betek hen. Ar FIPOL (Yalc'had etre- vroadel da zigoll diouzh saot- trezheñ an eoul maen) en deus prometet un taol sikour ma 'z afe an dispignou en tu hont da 15 milion. Savet e oa bet an aozadur-mañ da heul peñse an Torrey Canyon. 33 stad a gemer perzh enañ ha sevel a ra un taos war charrean an eoul-maen. Ne ouezer ket re petra a vo lod ar parrezioù koulskoude ha sur ne vo ket digoust evito.



"Kalz sklaeroc'h eo ar jeu bremañ evit na oa da goulz an Amoco Cadiz." a zisklerie Am- broise Guellec, Sekretour-stad ar Mor. Anat eo, met tu vo d'en em c'houlen arav penaos o deus graet ar plakennou kablus evit distagañ diouzh ar pont pa ne e c'helle ket ar mor kregiñ en- nac sañset. Gwir eo, ensellet pizh eo bet ar vatimant met keit ha ne vo ket kriz a-walc'h al le- senn gant ar c'kompagnunezhioù kablus e c'hellfeñ dere'hel da bec'hiañ dre zivezhet e-pad pell amzer c'hoazh.

Yann Pennhaleg
Skrivañ da : AL LIAMM
16, Strad des Four à Chaix
35400 - SAINT MALO -
Lennit al liamm
Koumaer bloaz 120 eur (skladenn, lod 100 eur)
bremañ 5

MAEZIOU

AL "LIBERALISM"

KLENVED AL LABOUR ZOVAR

Muioc'h mui a derzhienn a zo war maezioù Breizh. Terzhienn ha poan d'en emgaut, mizer mut alies e-giz m'hon eus bet tro d'hen lavaret dija e niverennoù Bremañ all.

"War nezh tarzhañ emañ ar brodukourien" eme P.ABEGUILLE, maer Plourizi ha kuzulier Departamant Penn ar Bed e-pad emvod diwezhañ ar c'huzul. Deuet edo P.ABEGUILLE, bet gwechall u-man eus renerien an FNSEA, d'an emvod ac'et gant dilennidi "SOLIDARITE et ACTION PAYSANNES" Nambour Douar Penn ar Bed, en deus bodet 500 peizant e Lokournan d'ar 26 a viz Genver.

Goude m'lo dije komzet Guy Le Fur ha dilennidi all "Kengevredad ar beizanted" (ur c'haz diouto izili eus UDSEA) diwar-benn stad ar brodukourien moc'h, laezh ha legumaj, e savas a-du P.ABEGUILLE hag A.CHEMINANT maer Lokournan da bouezañ ar muiañ ma c'hellfent war ar C'huzul Meur a-benn skoazellañ anezho.

Goulenñ a ra ar c'hegevredad :

■ ma vo roet ur yalc'had 25 lur dre bemoc'h gwerzhet e 1987 (betek 1500)

■ ma vo sklaeraet an doare da ingalañ ar c'hotaioù war al laezh en ur reiñ plas en dro d'ar c'hegevredad e bodad an departamant, dalc'het hiriv gant an FDSEA, hag en ur ledanaat c'hezh pouez ar bodad-se ha ne ingal hiriv nemet 10 % eus ar c'hotaioù dieub (ar re all o vezañ etre daouarn an embregerezhioù).

P.ABEGUILLE n'eus lakaet ar pavez dreist-holl war ar fed ma 'z eus ur riskl bras da welet ar c'homunioù lakaet diaes ke-nañ (betek ober freuzstal) gant niver ar beizanted o teuziñ. Piv a baeo al labourioù bras kaset da benn evit an hentou, an adlobernañ, an dour... ma tigresk eus an hanter niver ar beizanted ha d'eo heul hini ar c'henverzhourien er parrezioù bihan ?

Daoust hag eñ ec'h en emgavo gwelloc'h ar re, e-giz G. ROUE, rener an FDSEA, hag a lavar hiriv ne z'ou eus ket da zifenn produktourien ha n'int ket "compétitif". Pezh a zo iskis evit ur sindikad ! Pezh ne vir ket outañ da c'houlenn war un dro skoazell ar stad ! Liberalism, ya ! met pa 'za nat hepken... ?

Ar c'hegevredad a aozo ur vanifestadeg bras e Redon d'an 19 a viz C'hwevrer.

Daoust ha ne ranker ket gwelet e vanifestadegoù patret an FDSEA en devezhoù diwezhañ ez eus flaez bras en o loeroù ?

Ha re wir eo e c'heller bezañ mantret o welet moc'h hanterwarv lesket da greviñ war an hentou gant produktourien o vanifestiñ ha soñjal e kemeront doareoù gwall ziefedus da vru-dañ o stourm. Daoust hag eñ en deus interest a-benn ar fin an FDSEA da glask skoazell tud ar c'herioù ?

Bez e c'heller ivez en es c'houlenn petra 'n eus bountet lod da derrañ marc'had elektro-nek Kastell Nevez ar Faou (ouzh -penn 50 milion a frejhoù).

Da skoazellañ piv, seurt doareoù ? Ar re a glask bodañ ar muiañ niver a-benn gounid evit ar muiañ niver ? pe ar re o deus dibabet dija gant o c'hredo liberal pet peizant a zo dellezek da vevañ er bloavezh 2000 ? ■

J.K.



bremañ 6

KREIZ-BREIZH

BEVAN ER VRO

MANIFESTADEG EN UHELGOAD



1200 a dud, deuet eus ar c'hanton a-bezh o doa manifestet d'ar Sadorn 6 a viz C'hwevrer evit ma chomfe bev o bro.

Gwazed, merc'hed ha bugale Bro an Uhelgoad a oa en em vodet, unanet-holl, evit embann sklaer ne faot ket dezho e varfe o bro. 1200 den diwar 6000, da lavaret eo, unan diwar bemp, a oa deuet eno. Youl ar galloud da sarriñ ri-repoz ar re gozh ha da dennañ 54 eur-vech kelenn digant ar skolaj a oa penn-abez d'ar vanifestadeg-mañ. 250 den a zo dija hep labour. A-unvouezh en em lakaas an dud da c'houlenn groñs tor-

ridigezh an divizoù kemeret gant ar galloud. Ne faot ket dezho gwelet o bro dont da vezañ un dezerezh.

Kofniversanted, peizanted, kelennerien, micherourien, dilabourerien, an holl a vo aze. Sarret e voe an holl staliou. Dilennidi ar c'hanton a oa deuet ivez : an ao. Daniel CREOFF, maer Berrien ha kuzulier departamant ar c'hanton ; an ao.ao. Jean-Marie LOCHOU, eil-vaer Berrien ; Jean FOULER, maer Bolazeg ; Marcel ROYGNANT, maer Brenniliz ; Louis MONOT, eil-vaer an Uhelgoad ; Christian QUILLIÉC, eil-vaer ar Fouilhezi ; Albert ar GWERN, maer Lokmaria-

Berrien ; Louis PLASSARD, maer Plouriz ; Francis LANDRE, maer Skriznag hag e eil-vaer, an ao. Francis DRU. En em gavet e voe ivez, an ao. Patrice GADICU, dileuriad UGT ri-repoz ar re gozh ; an it. Joëlle MASSON, prezidantez tud bugale ar skolaj ; an ao. Michel FOULLARD, prezidant kanton an FDSEA hag an ao. Jean ROHOU, kuzulier departamant kanton Karaez.

N'eo ket evit ar plijadur an hini 'voe en em vodet an dud en Uhelgoad. Prest int, holl unaner, da vont betek penn evit ma chomfe bev o bro ha bev peok c'hoazh !

Gwenael Caradec

MANIFESTADEG AR SAVERIEN MOC'H

LUN 8/02 E KEMPER

DA BETRA MANIFESTIN'?

Ma ne fell ket deoc'h e veve komprenet kudennoù al labour desevel moc'h, deuit da vanifestiñ da Kemper.

1- O leuskel 200 pemoc'h er straejoù, o stankañ kreiz-kêr gant 100 traktor, o skuilhañ un tamm pep lec'h dour teil moc'h ha war an dremenidi kement hag ober !

2- En ur vont kuit frikit un nebeut moc'h ha lezit anezho da yudal arak mervel !...

Ya. Diaes eo din kompren, bevet 'm eus an dra-se d'al Lun 8 a viz C'hwevrer, ha koulskou-

de ez on kizidikaet ouzh kudennoù al labour-douar, hag ar sevel moc'h. War ar maez on bet ganet, ha meur a wech pa oan bihan e oan chomet da welet lazhañ moc'h, ha c'hoariz em eus bet gant va mignoned bolotenn (graet gant c'hwezigez ar moc'h) kement se evit laret deoc'h n'on ket ur paour kaezh plac'h bet desavet en ur gêr vras ha n'he defe morse gwelet loened diwar ar maez.

Fuloret on c'hoazh rak d'an dud a lare din : "met perak e kendalc'hont da sevel moc'h peogwir ez eus re ! na zegas mui a arc'hant h.a..." e klas-

ken displegañ ne oa ket re evit an ezhommoù, met prenet e vez ar moc'h e lec'h all, ha zoken ma fellfe d'ar beizanted ober un dibab all taper int gant an dileoù o deus hag an amrestoù da resteurel... Petra fell deoc'h a laret diwar-benn tud ouez hag a lare loened dirak ho taoullagad, ne oa ket diaesoc'h lakaat rod an traktor da dremen un tamm pelloc'h !

M'eus aon ar wech-mañ e vo an dud muioc'h aherzet eneb an desaverien voc'h eget biskoazh ha se dre fañz ar vanifesterien o-unan. ■

A.V.C.

bremañ 7

"BETEK PENN"

MANIFESTADEG E KEMPER



neg gant an archerien. Losket int bet da vont gant un dell-gastiz evit bezañ parket fall o c'harr a-raok mont da livañ!! Fuloret e voe an archerien rak n'o doa ket kavet na kolter na bombezennoù... er c'harr.

Graet hon eus un nebeut goulennoù digant un ezel eus S.A.B. a-ziv ar benn o stourm.

Bremañ Boas oc'h da labourat diouzh an nos, diouzh ar pezh a weler, e labourit ivez diouzh an deiz ?

S.A.B. Ya, avat. Labourioù zo a vez graet diouzh an nos, met pa c'hallomp labourat diouzh an deiz e reomp. N'hon eus mez e-bet da zifenn hor yezh.

Bremañ Anavezet oc'h, dreist-holl, evit livañ panelloù, setu aze ho tachenn-stourm nemeti ?

S.A.B. N'eo ket, met e-barzh Stourm ar Brezhoneg, hon eus divizet dibab paliou resis ha tizhout anezho, kentoc'h eget en em zasparchañ e pep lec'h ha

bezañ diefedus. Stourm a raomp, atav, war dachennoù all, e-giz hini an tele, ar radio, ar vellestradurezh pe c'hoazh hini ar skol, betek ma vo ofisiel ar brezhoneg e Breizh !

Bremañ Lavaret a reer, an dilennidi da skwer, n'eo ket an dra vat, ar pezh a ra SAB hag e vefe gwelloc'h na vefe ket eus an dra-se.

S.A.B. Evel-just, n'hall ket an dilennidi lavaret ez int adu-gant hon doare stourm. Met prouñ a reont ar c'ontrol. A-raok pa ne veze ket livet ha distrujet ar panelloù, ne oa netra, dibae, e weler panelloù brezhonek o tiwanañ war an hentoù; war re departamant Aodoù an Hanternoz, da skwer, pe re ar parrezioù. N'eo ket evit ar plijadur e livomp ha distruomp panelloù, met ar fedoù a brou n'eus nemet an doare-se evit dont a-benn. Stourm a raomp betek penn, betek ma vo lakaet ar brezhoneg da yezh ofisiel e Breizh. ■

Gwenael Caradec

LIZHER DIGOR D'AN Ao. JOSSELIN

Aotrou Prezidant,

D'ar 24 a viz Du 1986 e voe divizet gant Kuzul Departamant Aodoù-an-Hanternoz staliñ panelloù divyezhek war vor ul lodenn eus hentoù an departamant.

Kerkent hag an 30 a viz Du e roemp da c'houzout e oa un diviz a-zoare, en ur c'houlenn resisadurioù, koulskoude, diwar-benn ar mod d'e gas da benn. Gant se e oamp chomet hep livañ panelloù hentoù an departamant e-pad meur a viz.

Dav eo gwelout hiziv emañ pell Yann ouz e gaseg pa'z eus bet lakaet panelloù unyezhek war vor an hentoù meneget e diviz ar C'husul Departamant, ha zoken war vor an hent C.D. 786 Lannuon-Landrevent.

Abalamour da se hon eus

bremañ 8

roet lañs adarre d'hor stourm ha n'eo ket ar prozezioù a lakaet ac'hanomp da bazout.

Lezit ac'hanomp, ni ho ped, d'en em c'houlenn petra en deus broudet hoc'h Eil-Prezidant kentañ, Per-Iffig Tremel, da c'houlenn muioc'h a waskerzh en hon c'heñver. Plaset eo re vat an difemer taer-mañ eus hor yezh evit ohom hep gousout emañ ar giregezh da vezañ klas-ket e lize ar Stad. C'hall a zalc'h da lakañ ar brezhoneg; evel a lavare François Mitterrand e miz Ebrel 1981. Arabat fasiañ war an enebourien !

Ha gousout a rit ez eus bet kondaonet ugent a stourmerien a-benn bremañ gant al lezioù-barn gall da baeañ tremen ugent milion a santimou a del-loù-kastiz hag a zigolloù ? Hag

eo bet kollet e labour gant ur nan anezho, kargad anezhañ ?

Pa 'z eus drouk gameoc'h ha gant gair abeg, o klevet bar-nedigezh Chikago er afer "Amoco Cadiz", na rit ket ac'hanoc'h kenoberourien ur peñse all, hini ar brezhoneg, na vo digoll ebet gouest d'e adlakaat da vezañ.

Gant hor gwellañ gouez 'he-memou breizhek.

E anv Stourm ar Brezhoneg, ar sekretour : Mikael Kerbloas.

20 a viz Genver 1988

Degemer a ra Brezhoneg Ofisiel (50, straed Hamon 35000 Roazon) Chekennoù ha skodennou nizek da skozeziñ ar stourmerien kondaonet da baeañ tellou-kastiz. Bezit brokus.

DAEL SKOL AN EMSAV



Malo, Kinnig diwezhañ ar C'husul evit diorren an douristezh sevenadurel en deus roet tro d'ur c'hendiviz startoc'h.

LABOUR DOUAR PE DOURISTELEZH ?

Daoust ha n'emaomp ket, gant an hent-se, o filellec' skodennet pa weler ar c'hudennoù grevus a sav gant al labour-douar er vro ? Pe neuz, en ur bed lec'h ra 'z eo bihanoc'h bihanañ lodenn al labour dorn abalamour d'ar mekarikezh ha d'an elektronek, daoust ha n'eo ket ret kavout tachennoù otreñev nevez o tifenn war-un-dro hor sevenadurezh hag hor c'hultur ? Chom a ra digor an diviz.

Skol An Emsav a fell dezhi kenderc'hel da lakaat ar pouez war vBurev Europa ar Yezhoù Gwasket. Pouezus eo evit an darempred gant ensavadurioù Europa ha gant ar broioù all. Diaes eo avat lakaat strel-ladoù disheñvel Breizh da gen-berzh en un doare gwirion e Komite Breizh. Ar roll c'hoarriet gant ar Burev a zo bet abouez kenañ koulskoude, da skwer evit prientañ manifestadeg Diwan Montroulez warlene. E Broc'hall e c'heller bezañ ur benveg da reiñ keleier ha da berezañ war ar galloud.

Daoust d'ar startijenn e chom grevus stad ar yezh. Enebig ar zaloud a zo ken kreñv ha biskaozh. Treut ec plas ar brezhoneg war ar skramm bihan, war wagennoù ar skramm, pa ne vez ket digalonekaet ar selav-errien gant an diotachou a glevont e galleg a-hend-all ("Radio Bisou" war R.B.O.). Ur stourmad war an dachenn-se a vefe da vezañ kaset war-raok gant ur seurt R.T.B. nevez marteze. Hag evit pezh a sell an divyezhezh war ar panjoù-divyezhezh evit ur c'hendiviz bras vefe ac'et ur c'hendiviz gwelet gant an dud e karg evit gwelout penaos e c'has war-raok.

bremañ 9

Dael Skol An Emsav zo bet dalc'het d'an 31 a viz Genver e Roazon. Da gentañ o deus gellit an izili gwelet frouez al labour graet a-bae bloaz evit yac'haat ar me-rezezh. Ret e oa bet lakaat ar sekretourez er-maez araok hec'h adimplij hanter-anzer. Krennet eo bet war an dispignoù feurm hag adkempennet salioù brasoc'h evit sez Roazon. Ur stum nevez ha marc'hadmatoc'h a zo bet kavet evit ar gelaouenn BREMAN.

A-bouez e oa, rak diaes eo labourat hep diazezoù yac'h. Met, a-hend-all, evit Skol An Emsav, a-koulz hag evit ar c'hevredigezhioù all, n'eus netra sur en da-zont abalamour da bolitikezh sevenadurel ar stad e-keñver sevenadur Breizh : aon a zo da gaout e vefe digresket c'hoazh ar yalc'hadou.

Kalz labour a zo bet kaset war-raok bepred. Daoust da zigresk niver ar c'hentelioù noz, dre zigresk niver ar gelennerien ha n'eo ket hini ar skoldi, e ran-ker merkañ ar striv graet evit "Bremañ", ar gelaouenn nemeti e brezhoneg e gwirionez, an em-toc'h magazinnoù pe levrioù lennegezh ha studi. IJIN, savet bloaz zo evit skignañ levrioù brezhoneg a zo aet war-raok hag

en deus roet ur skoazell d'an embannerien pa 'z eo aasoc'h, hiziv-an-deiz embann ul levri, a-drugarez d'ar skoazelloù a zo, eget e werzhañ.

STUMDI a zo ur raktres kozh o tort da wir, evit reiñ d'an implijidi en embregerezhioù un anaoudegezh denc'h eus yezh ha sevenadur Breizh a drugarez d'ar stummadur dibae. Ar c'hel labour gant Diwan ha kevredigezhioù all war an dachenn-se a zo un doare ober talvoudus da vezañ diorret. Ur skouer all a zo ivez ar staj kelenneriezh kenaozet e miz C'hwevrer gant Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien, ar Falz, Unvaniezh ar Gelennerien, ha Skol An Emsav. Degemer ar gazetenn delennetek "kelaouenn" sekretouriezh Eil Derez Diwan ha sekretouriezh Kuzul Sevenadurel Breizh a zo doareoù all all da genlabourat.


Kuzul Sevenadurel Breizh a zo bet dalc'het bev ha lakaet da labourat war amvezioù re-sis. Bet 'n eus bet da gentañ, da zifenn ar c'hevredigezhioù breizhek hag o yalc'hadou. Mer kroget en deus ivez d'o lakaat da brederiañ diwar-benn o labour e-kerz un dibenn sizhun e Kreizenn la Briantais e Sant

YEZH ETREVROADEL

KANT VLOAZ

- HERGÉ -
★
LA AVENTUROJ DE
TINĈJO
★

LA KRABO
KUN
ORAJ PINĈILOJ



CASTERMAN

C'hwec'h mil den eus dek bro ha tri-ugent o kao-Varsovia, kêrbenn Polonia, e penn kentañ miz Eost Esperanteg, ar yezh etrevroadel bet savet gant Loeiz Lazar Zamenhof.

E Polonia eo bet lidet kantved deiz-ha-bloaz ganedigezh an esperanteg, ar yezh etrevroadel krouet nemeti n'eo ket aet da get. Loeiz Lazar Zamenhof, krouer an esperanteg, a oa bet ganet e Bialystok, ur gêr a oa da neuze e Rusia met a zo bremañ e Polonia, e 1859.

Bevañ a reas e yaouankiz e-touesk Poloniz, Rusianed, Lituaniz, Yuzevien hag Alamaned o chom mesk-ha-mesk er vro-

hont. Abalamour da se e teuas abred d'en em soñjal war gudenn ar yezhoù hag ar pobloù. Hag e 1887 e voe embannet e Varsovia e levr kentañ da zeskiñ ar yezh ijinet gantañ, sinet gant al lesanv "Doktoro Esperanto", "an doktor en deus spi".

Pell amzer e tremenas o Zamenhof, ur mezeg yuzev anezhañ, a ouie e-unan un dek ben- nak a yezhoù ha, da ziskouez

ETRE 4 HA 15 MILION

talvoudegezh ar benveg ijinet gantañ, en em lakaas da dreiñ skridoù digant meur a skrivagner, e meur a yezh. Ne ginnige ket ur yezh peurc'hraet ha peurvat hogen un nebeut reolennoù diazev evit ur yezh a c'hellfe bevañ ma vefe degemeret gant an dud.

Un nebeut bloavezhioù war-lerc'h e veze kmzet esperanteg e meur a vro gant Gallioed - Sinaiz - Skandinaviz - Slaved hag all. E 1905 e voe graet e Boulogne-sur-Mer en hantnoz Bro-C'hall ar c'hendalc'h esperanteg etrevroadel kentañ. Des- et e oa di 688 den eus ugent bro disheñvel, hag en o zouesk Zamenhof.

Ma reas berzh an esperanteg ken buan-se eo moarvat a drugarez da frammadur ar yezh-se : dre genaosañ dibenn-gerioù ha rak-gerioù gant un toullad gwirziennoù e c'heller sevel ur bern gerioù nevez. Er yezhadur n'eus nemet 16 reolenn ha n'o deus direizhadenn ebet. Daouzek dibenn disheñvel hepen a gaver e displegadur ar verboù. Kemet arouez a zo el lizherenneg an deus un delvoudegezh hag unan hepen evit an distagañ. Dieub a-walc'h eo urzh ar gerioù er frazennoù. Unan eus ar reolennoù diazev gant Zamenhof a lavar e tleer degemer ar yezh ar gerioù "etrevroadel" a gaver e kalz yezhoù.

Gant Akademiezh an Esperanteg e vez renet buhez ar yezh. Kavet e vez abeg enni gant tud zo a lavar n'eo ket ur yezh "naturel". Respont a ra an esperantegerien ez eo ur yezh bev, he deus kemmet abaoe he ganedigezh evel n'eus forzh pe-seurt yezh all. Mareoù du a zo bet en istor an esperanteg : berzet eo bet gant hogos pep diktatour, gant Stalin, gant Franco, gant Mao, gant Salazar, gant Mussolini, gant Hitler... Kalz esperantegerien a voe kaset da gampoù-bac'h an Nazied hag evel-se eo e varvas mer- c'hed Zamenhof.

AN ESPERANTEG KINNIG

ETA

KINNIG

A ESPERANTEGERIEN ER BED

60 DEVEZH

E-pad kendalc'h esperanteg Varsovia e voe diskleriet ma vefe savet e Bialystok, ar gêr a oa bet ganet Zamenhof enni, ur greizenn etrevroadel da zeskiñ ha da studiañ an esperanteg. E-pad ar c'hendalc'h e voe c'hoariet un toullad pe- zhoù en esperanteg ; etre ar

sonadegoù hag an diskouezadegoù e oa ivez bodadegoù labour. Kannerien eus Bro-C'hall, Polonia ha meur a vro all a voe klevet o kanañ en esperanteg. Tu a oa da velet lod eus ar 3000 levr a gaver da bremañ en esperanteg. Diskouezet e voe ar film hir kentañ bet eilet an esperanteg, "Le en Eüropo" (tu ben- nak en Europa), ur film diwar- benn emivadur an eil brezel bed, savet gant an Hungarad Istvan Vajda.

War-dro 10 000 esperanteger a zo er Stad C'hall. E skolioù-meur Pariz-VIII, Clermont-Ferrand, Ais-de-Provença ha Roazon e vez kelennet. Lakaat an esperanteg da yezh da zibab er skolioù eil derez a vez gou- lennet ant an esperantegerien. Kinniget e voe e meur a zanvez- lezenn, da skwer e 1975, e 1979 hag e 1980. Siwazh n'eo ket aet pelloc'h an danvezioù-lezenn-se eget ar re bet savet diwar-benn ar yezhoù "rannvroel". Studiñ ur graet er bed a-bezh a ziskouez e c'hellfe bezañ desket buan hag aes gant ar vugale. Ur sko-

liad galleg, da skwer, a diz- fe goude ur bloavezhad studi an esperanteg ul live heñvel ouzh an hini a dizhe e saozneg goude c'hwec'h bloavezhad stu- di.

Anavezet eo ar yezh-se e broioù Skandinavia, e Reter Eu- ropa hag e Sina dreist-holl. E-touesk an esperantegerien vrudetañ emañ Anatole France, Gorki, Tolstoi, Einstein, Tito, Roparz Hemon hag ar skrivagner sinaek Fa Kin. Etre 4 ha 15 mil- lion a esperantegerien a vefe er bed a-bezh.

Aozadur ar Broadoù Unanet hag an UNESCO o deus diskouezet meur a wech ne cant ket dise- blant ouzh an esperanteg, met n'int morse aet gwall bell gan- ti. Div wech e voe votet er UNESCO mennadoù a-du gant ar yezh etrevroadel. E 1976 e voe erbannet gant ar Broadoù Unanet an diskleriadur etrevroadel di- war-benn gwirioù Mat-Den en es- peranteg.

Spi o deus paotred ha merc'hed ar "Yezh Etrevroadel" e voe roet gant kantved deiz-ha- bloaz krouidigezh Zamenhof ul lañs nevez d'an esperanteg er bed.

Iwan Kadored

N.B.: gant SKOL OBER e c'heller deskiñ esperanteg dre ar brezhoneg.

La sukceso de Fiat 127

En ĉiuj merkatoj de la mondo la 127 plene sukcesis pro siaj projektaj ecoj vere esceptaj, la ĉiuj igas ĝin ĉiutage pli aktuala. Al la internaciaj distingoj kiujn ĝi ricevis de ĵurnalistoj kaj teknikistoj ĉiulandaj dum la unuaj du jaroj de sia vivo (de 1971 ĝis 1972 la 127 estis 4 fojojn elektita en Eüropo kiel "Veturilo de la jaro") aldonigis pli poste aliaj.

Bruderezh evit Fiat, embannet gant an ti italian-se.

ARS AV-BREZEL

Kinniget e deus an E.T.A. (Arme Kuzh Euskadi) un arsav-brezel tri-ugent devezh da c'houarnamant Spagn, evit ma c'hallfe an divizoù mont war-raok. Dibaoe euzhpenn bloaz zo e voe kroget an E.T.A. ha gouarnamant Madrid da eskemañ o soñjoù en Aljeria. Txomin an hini eo a gase an traoù war- raok en anv an E.T.A.. Mervel a reas herrañ avat, en ur gwall- zarvoud karr-tan, sañset. Setu ma chomas sac'het an hent etre an daou aozadur. Dibaoe pell zo dija emañ an E.T.A. o kinnig eskemmoù gant gouarnamant spagn war ziazeoù K.A.S.(*) Goulenn a ra evit chom a-sav gant ar stourm armet, an distaoliadeg evit holl stourmerien politikel Euskadi, skarzhadeg arme ha po- liz Spagn eus Euskadi ha gwir pobl Euskadi da en em ren hec'h unan. Nac'het en doa betek hen gouarnamant Spagn da asantiñ da ginnigoù an E.T.A.

Ar pezh zo nevez ar wech- mañ, avat, eo e seblante prest an E.T.A. da baouez da vat gant he stourm, ma vefe asantet gant Madrid, an distaoliadeg. Losker a rafe H.B. (Herri Batasuna), emsav politikel evit an dieubi- digezh vroadel hag ar sokialou- rizezh eaveret, da gas ar stourm war-raok en ur eskemañ gant Madrid.



N'en deus ket asantet, e- vit c'hoazh, gouarnamant Spagn da ginnigoù nevez an E.T.A. Goulenn a ra e vefe paouezet da vat gant ar stourm armet a-raok krogiñ da eskemañ. E bal, avat, zo distruj an E.T.A. hag an Em- sav broadelour en Euskadi, ar pezh n'eo ket pare da zont a- benn.

Gwenael Caraded

(*) K.A.S. kenzaozadur a vod em- savioù broadelour a-bep seurt: ETA, HB, LAB (sindikad Euskadi) h.a.

AFRIKA AR SU

KROGAD ER PARLAMANT



Parlamant Afrika ar C'hreis-teiz a zo rannet etre teir c'hambri, hini ar re wenn, hini ar re a liv sañset, hag hini ar re a liv sañset, evit muiñ niver ar re zu. Pa zigoras dalc'h-parlamant ar bloaz ar miz-mañ e komzas ar Prezidant Botha dirak an teir c'hambri bodet en ur mell ti nevez a 340 plas savet e kêr ar C'hap evit 16 milion \$. Ne vo ket implijet kalz ar sal nevez kredapl bras.

Goude d'an holl bezañ kle-
-vet prezegenn Botha diwar-benn
-e politikerezh ekonomikel en em
-zistranne an teir c'hambri bet
-kenstaget evit ur pennadig kin-
-niget en doa ar gouarnamant he-
-velep bodadegoù a-gevret gwech
-ha gwech all koulskoude met
-Kambri Kannaded an dud a liv he
-deus troet kein ouz ar c'hin-
-nig, un aluzenn eo tra ken eme
-he rener Allan Hendrickse. N'eo
-nemet ur c'hrogad ouzhpenn etre

Botha hag Endrickse, gwelet e
-oa bet o vanifestiñ a-enep d'an
-Apartheid dija war un draezhenn
-evit ar re wenn warlene. Gant
-e Strollad Al Labour o terc'hel
-76 sez war ar 85 hini a zo
-Kambri an dud a liv eo savet
-Hendrickse meur a wech a-enep
-da lezennoù Botha ar bloaz-mañ,
-meur a adkinnig en deus lakaet
-d'ar "Group Areas Act" a droc'h
-Afrika ar C'hreisteiz etre ta-
-kadoù disrannet.

Gant e Strollad Broadel
-o terc'hel 133 sez war ar 166
-a ya d'ober Kambri ar re wenn,
-n'eo ket bet gwall zirenket Bo-
-tha en e politikerezh. Ne c'hel-
-lc ket mirout ouz Hendrickse
-da herzel ur c'hinnig all koul-
-skoude : daleñ ar votadeg eus
-1989 da 1992. Spontet gant
-berzh Strollad ar Virourien (tu
-dehou pellañ) e votadeg warlene
-e oa e soñj Botha kas pelloc'h
-mouezhiadeg ar bloaz a zeu gant
-aon da goll ar gouarnamant. An

daleñ a rank bezañ asantet
-gant an teir c'hambri avat. La-
-ret a ra Hendrickse ne savo a-
-du nemet ma tenn kuit Botha ar
-"Group Area Act" ha n'eo ket
-nemet damgenmañ anezhañ gant
-adkinnigoù. "Ma tala'hit da
-c'hoari gant ar "Group Area
-Act" hep cheñch penn d'ar vuzh
-e ranko Strollad Al Labour kas
-ao "kanc'h en-dro d'ar burevioù
-botañ a-benn ar bloaz a zeu."
-a lare Hendrickse da P.W.Botha.

Bac'het e oa bet Hen-
-drickse e-pad daou viz evit a-
-begoù politikel e 1976. E niz
-gwengolo 1984 e teuas da vevañ
-kadoriad kuzul ministred kambri
-an dud a liv ha plas a gavas
-evel-se e Kabined Botha. Pa
-ouezas ar Prezidant e oa e-soñj
-Hendrickse mirout outañ da za-
-leañ ar votadeg e roas dezhañ
-da c'houzout e rankfe kuitaat
-ar C'habined. E zilez a roas
-Hendrickse diouzhtu. Klask a ra
-Botha rannañ Strollad Al Labour
-o lakaat unan bennak all en e
-benn, aesoc'h ober gantañ.

Ma chom Hendrickse e penn
-e strollad e ranko Botha divo-
-dañ ar Parlamant a-benn miz
-Gwengolo 1989. Soñjal a ra Hen-
-drickse ez avat war raok e stroll-
-lad ar votadeg. "N'omp ket gwe-
-let ken evel kenlabourerien ar
-sistem" eme Hendrickse "ha gwe-
-loc'h e vez gwelet e strollad
-gant kumuniezh an dud a liv.
-N'eo ket troet Botha da cheñch
-e soñj avat, ha ne zistroio ket
-war ar "Group Areas Act"... Gor-
-toz pell gortoz gwell neuze ■

Yann Pennhaeg

BEP DAOU VIZ LENNIT
AL LANV
59, hent
KERDRONOU VIHAN
29000 kemper
KOUARNANT BLOAZ 100 lur
SKOAZELL : adalek 150 lur.

KELEIER



BREMAN

Neus ket trawalc'h a gen-
-labourerien feal gant
-BREMAN evit ober ar gaze-
-tenn a garfemp : liesseurt ha
-kelaoet mat. Ha nebeutoc'h a
-gelaouerien a zo, ken e vez
-diaes dimp skrivañ diwar-benn
-darvoudoù n'anavezomp ket gwall
-vat. Ur skwer ? Koumoulen
-tamrus Bro-Naoned warlene :
-pennad ebet, na keloù ebet di-
-ant lennerien Bro-Naoned. Pen-
-naos e c'hallfe izili skipailh
-Bremañ skrivañ er o lec'h hep
-gouzout tra ?

Ha ma vez ger ebet diwar-
-benn harz-labour pe manifesta-
-degou el lec'h-mañ-lec'h, ar
-strollad politikel-mañ pe ar
-gevredigezh sevenadurel-hont eo
-peogwir ne vez ket kaset keleier
-dimp gante, na ganeoc'h.

N'hallomp ket, evel er
-skingomp pe er skinwel, mont da
-gerc'hat ar c'heleier gant an
-dud : n'eus den paeet evit se
-ganimp. Hag an dud a blij dezhe
-fistilhat dirak ur mikro n'o
-devez ket noll kalon da dapout
-o fluenn da skrivañ pernadoù.
-Gant al lennerien a soñj er o
-c'hazetenn eo e vez graet BRE-
-MAN.

M.K.

EVIT LEZENN AR YEZHOU

Gant kuzulioù departaman-
-toù Penn ar Bed, Aodoù an
-Hanternoz hag ar Morbihan
-ez eus bet votet ur mennad o
-c'houlenn digant kannaded
-Breizh skrivañ da sevel ul le-
-zenn evit ar yezh a c'hortozet
-abaoe meur a zek vloaz.

Skridoù hañvel zo bet
-mouezhet warno gant Kuzul Eko-
-nomikel Breizh ha gant ar C'huzul
-Rannvro ha 70 a barrezioù
-o deus graet kemend all.

Derc'hel a ra e keit-se
-Emglev Breiz da zastum sinatu-
-rioù evit pouezañ muioc'h
-c'hoazh war ar gannaded, tost
-da 50.000 zo bet betek-hen. (Em-
-glev evit Lezenn ar Yezhoù 40,
-straed ar Republik 29200 BREST)

EMGLEV BRO AN ORIENT

Degemeret hon eus gant an
-Emglev ur follenn c'halle-
-lek o kemenn listenn ar c'hel-
-telioù brezhonek e bro an
-Orient e 1988. En Enez Groe,
-d'ar Sadorn da 9 eur noz, d'al
-Lun da 8e30 noz.

.E Lanester d'ar Meurzh da 8e
-noz evit an deraouerien ha d'ar
-Yaou da 8e30 evit ar eil hag an
-trede bloavezh.


.E Plañvour, e Kerskoed, d'ar
-Merc'her da 8e noz evit an de-
-raouerien ha d'ar Meurzh da 8e
-noz evit an eil bloavezh.

.E Plañvour, e Ti ar Sonerezh,
-d'ar Yaou da 9 eur noz.

.Ha bodadegoù d'al Lun da 8e30
-noz evit brezhonegerien.

Diskleriadurioù a c'hall-
-ler goulnenn digant an Emglev,
-1 hent dall François Le Leve -
-56100 An Oriant.

Hon gourc'hemenoù da dud
-an Emglev evit o labour a
-c'hallfe bezañ kemeret evel
-skwer e meur a gêr a Vreizh.
-Prest omp evel just, da vrudañ
-obererezh an holl gevredige-
-zhioù brezhonek, evel re Bariz
-ha Redon er mizioù diwezhañ.



EURVAD

Setu doareioù ur c'helen-
-ner brezhoneg eurus ! Ma,
-evidon-me en a mat an
-traoù : ur c'huzulier pedagogel
-am eus, unan gwir, pezh nend eo
-ket gwir get rac'h ar gapesidi ;
-lakaet eo bet ma eurvezhioù ke-
-lenn e implij amzer normal ar
-skolidi, ha nend eo ket etre
-kreisteiz ha div eur, pe ar-
-lerc'h pemp eur, evel get lod
-hag ur bochad skolidi am eus-
-ar-dro 100 en oll, rannet e
-pemp klas, pendeogwir e skolaj
-ar Gemené eua ret d'ar vugale
-a zo en c'hwec'hvet klas stu-
-dial sevenadur Breizh, hag er
-bempvet klas studial brezhoneg
-kenn, ha gellin a rañt choazñ
-brezhoneg evel LV2, pet a ray?

F.Louis



Ur magazin all, miziek ha breizhek hemañ en deus kinniget e niverenn gentañ e miz Genver: "FORCE-QUEST" a zo ur "gelaouenn ekonomikel rannvroel dis-tag a-grenn eus pep ensavadur" hervez e rener Jean-Claude MASON. Met fellout a ra nemestrañ da bennoù ar gazetenn adstagañ Naoned ha traoñ al Liger ouzhu peurrest Breizh, "evit abegoù ekonomikel nemetken" emezo. "Ha gwella-a-se ma klot ouzhpenn gant Breizh istorel". Met dreist-holl "na rit ket anezho adunvanerien douet, liverien banojoù pe tarzherien kastell Versailles". Komprenet hor boa,

n'eo ket doareoù pe sonjoù ar batronez a zo oc'h ober war-dro. Marteze int e-touez ar renerien embregerezhioù dezho un emskiant breizhat, a gaver anezho kemend-all e Breizh hervez niverenn miz C'hwevrer ar "Peuple Breton" a adkemer disoc'hou un enklask embannet gant "L'Entreprise" kazetenn J.L. Servan-Schreiber. Pennadoù diwar-benn Citroën, ar bankoù e Breizh, "Breiz-Europe", "Kannadri Breizh e Brussel a c'heller lenn. Un danevell diwar-benn lec'h ar rannvroioù en Europa ha diwar-benn Georges PIERRET, sekretour-meur ha krouer kevredigezh Rannvroioù Arvor Europa, a zis-kouez ez eo ivez Europa eil dibab a-bouez ar magazin. Dedenus, 20 lur ar pech, 200 lur ar c'houmanant da "Force-Quest" Parc d'activités le Hill, 35230 Noyal-sur-Seiche.

Daou bennad a oa diwar-benn Breizh e niverenn 3 Politis, ar gelaouenn gall nevez, a-gleiz.

Ur pennad hir a dri bajenn diwar faskourien kêr-vreizh Europa. Ur gelaouenn sirius a fazi da Politis bezañ. Perak, neuze, pouezañ kement-se war ken nebeut a dra? Ne gontet ket ouzhpenn dek den e-touez faskourien Breizh Paris. Padal, pa lemer pennad Politis, e kredor eo emev Breizh breiznet gant ar razhedern faskour.

Ur pennadig a gaver ivez diwar-benn Diwan "Ar brezhoneg, emezo, a vefe komzet e kornog ul linenn St Briag/Obened en ur vro arvet Basse-Normandie(sic)"

Politis, ur gelaouenn sirius, ya, pas evit ar pezh a sell ouzh Breizh, avat!

Go. Caradec



LE COURRIER DE L'UNITÉ un niverenn nevez eus kazetenn ar C.U.A.B. (Kuzul evit unvanidigezh Breizh) a zo deguezhet ganeomp. Ur pennad-stur hir diwar breder Ronan DANTEC a ya d'ober al lodenn vrasañ anezhañ.

En em c'houllenn a ra ha n'eo ket penn kentañ ar fin evit "Broioù Al Liger", ken nebeut a dud a gred enoc, ha pa 'z eo ret kaout ur bersonelezh kreñv evit en em zifenn e-touez rannvroioù Europa hag ar Bed.

A-hend-all ez eus keleier diwar-benn ar radio nevez "ALTER-NANTES", savet nevez 'zo e Naoned. Abaden vrezhoneg d'ar Sul etre 0e30 ha 7e30 noz.



KAFEDI-TI KRAMPQUEZH abadennoù-noz A-BEP SEURT

Etre ROAZHON ha DINAN (ul lec'h plijus degemer e brezhoneg, da 25 mn eus Roazon III)



DEIZ

En amzer gwezharall, un devezh er bloaz, en dezo an dud an droed d'ober ar pezh a garent, evel ma karent: deiz Meurlardez e oa henneg. An deiz-se en dezo an disterañ peizant an droed da lâret "kaoc'h" d'ar brasañ Aotrou ha d'ober goap anezhoñ par m'e c'helle; hennañ ne veze ket feuket tamm erbet pendeogwir e oa Meurlardez a oa, ha n'en dezo ket an droed naket da gastiziñ ar paour-kaezh peizant, na da lakaat galloudoù hag infitustionoù ar vro (an archerien, ar Justis, ar mediaoù ma vehe bet anezhe en amzer-se) da waskiñ arnezhoñ; evel rezon e c'helle eñ ivez lâret "kaoc'h", ha gwazh c'hoazh mar kare, da hennañ...

Ur rubrik seurt get "Taolioù Pluenn" a zle bout en ur gazetenn ar memes tra get Meurlardez er bloaz: an heni a skriv e-barzh ne zle ket bout tamallet get infitustion erbet, hag en ur gazetenn ar skipailh a eo eñ reñt a zo un infitustion: die eo dezhi bout neptu en tabutoù a vezh etre al lennerion.

P'am eus lennet ar pennad skrivet get skipailh BREMAN da heul pennad Mikael Madeg em eus bet ar santimant e oa roet ur taol klezeñv e kein hag e dorn ar skrivagnour-mañ: savet ho peus ur rubrik a zo he rezonoù hag he fal kiñnig pennadoù flemm, ha bremañ en un doare trañsus e kavet si d'unan hag a skriv e-barzh! En un doare trañsus e lâran rak nend oc'h ket tamm erbet ar ar memes pennad getoù, hag en em servijet ho peus ag ho lec'h evit en tis-zhout: ul lennour eo, evel ar re 'rall, ha c'hwi a zo e penn ar gazetenn; sinet en deus e bennad, c'hwi a zo chomet dianav (piv eo "Bremañ", da piv e c'hellay respont?); skrivet en deus hervez spered ar rubrik, ha c'hwi ho peus faziet e-neptoù, rak ho pennad a haf-val doc'h ur skrid-barn ("N'ho peus ket droed da bismigañ brezhoneg ar re 'rall, dre ma rit fazioù ivez!") kentoc'h evit doc'h en taol pluenn, ha kavet em eus e oa blaz ar "revanche" getoù.

MEURLARDEZ

Nend on ket é klask difenn ar Spazher laou (a-walc'h eo evit en ober e unan, kalet eo e groc'her) met spered ar rubrik-mañ: reñt a ra tro d'an dud da lâret ar pezh a soñjont, hep ne vehe feuket heni (Meurlardez...), hag evel-se e c'hellardez...), hag evel-se e c'hellardez...), hag evel-se e c'hellardez...), hag evel-se e c'hellardez...)

Pec'hed eo nend eus ket 'met Mikael Madeg é skriv er rubrik-mañ, ar re 'rall marse ne gredont ket ober, ha nend eus ket ho pennad a roay ar galon d'an dud da gemer o fluenn da reñt un taol get. Fiziãñ am eus e kemeray Sten Chartonneau e heni, ha ma savay ur pennad ar flemmusañ m'e c'hellay da respont d'e damallour, rak an Taolioù Pluenn, doc'h pennad siletus, a zo bourrus da lenn, ha nend eo ket tamm erbet un dizenor bout tamallet en doare-se, rak nend eus ket 'met ar re na reont ket netra na vint ket jantez kavet si erbet dezhe, hag ar evidon-mes eo eus fiziãñ eus ar bochad taolioù pluenn e burevioù Bremañ a-zivout ar film am boa c'hoarriet e-barzh -Lennerion cer, ma n'ho peus ket skrivet c'hoazh, grañt mar plij, na vezit ket digas em c'hwevrer! - Pardonñ a ran dedoc'h evel m'e c'houllennan pardon get ar re am eus kaset c'hoazh ar re a gasin c'hoazh ar o lerc'h en amzer da zonet: lakaet em eus ur bochad amzer da skriv ar pennad-mañ, ha keneve am eus istim doc'h te, m'am behe talet ma fluenn gwerso.

François Louis

S TUMDI (Stummadur Dibaouez) a zo o klask un TUC (ez) sekretour (ez) brezhoneger (ez) skrivañ pe pellgomz da STUMDI BP 22 - 29214 - LANILIZ - pellg 98.04.08.31.

KEMENNADENNOU

AR C'HEVREDIGEZHIOU A C'HOULENN UR STATUD EVIT YEZH HA SEVENADUR BREIZH

DEIZATAER

War atizh Kuzul Sevenadurel Breizh eo bet bodet kevredigezhioù sevenadurel Breizh (*) e Roazon d'ar Sadorn 13 a viz C'hwevrer evit gouzout pe em-zalc'h kaout da geñver dilennadeg Prezidant ar Republik.

Savet eo an holl a-unvouez evit ma vefe goullennet ouzh an danvez-prezidanted (2) hag eñ int prest da lakaat votiñ ur statud evit yezh ha sevenadur Breizh koulz hag evit yezhoù ha sevenadurioù pobloù all ar Frañs. Engav a vo goullennet outo.

Goullenn a reont avat e vefe kemeret divizoù gant ar Prezidant kerkeret ha dilennet evit ar pezh a sell pennoù resis evel DIWAN, an DEUG brezhoneg, kresk an abadennoù brezhoneg ha diwar-benn sevenadur Breizh war gannabon ar skingvel hag ar skingomz, ar panjoñ-hent divyezhek, Bro Naoned e Breizh.

Evit pezh a sell an Aotrou CHIRAC, kentañ Ministr, n'hellont ket sellet outañ evel ur danvez-prezidant e-giz ar re all. Goullenn a reont outañ eta diskoulmañ diouzhtu kudenn dazont DIWAN hag hini an DEUG brezhoneg.

Kaoz a zo bet diwar-benn an doareoù a zo da vevañ implijet evit ma c'helle an emsav sevenadurel unvaniñ e nerzh. Divizet eo bet gant ar c'hevredigezhioù sevel ur C'homite E-vezhiañ a vo e roll lakaat doujañ d'ar promesaoù ha da wirioù Pobl Vreizh.

(*) Kendalc'h, Kuzul ar Brezhoneg, Skol an Em sav, Ar Falz, An Oaled, C.U.A.B., B.A.S., DIWAN, La NEF, Bretagne Gallèse, FALSAB, Skol-Uhel ar Vro, UPRACB, Kan Douar, War 'l Leur, Engleo Breiz, Pôetes de Bretagne, Burev Europa, A.P.L.B.

(2) Ne vo ket skrivet na goullennet emgav gant Le Pen a zis-kouez dre e gomoù hag e em-zalc'h ez eo kontrol d'ar gwirioù diazez a stourm ar c'hevredigezhioù evito.

4-5-6 A VIZ MEURZH gouel vras ar "RIGODAILLES" 1988 e ROAZON

19-20 A VIZ MEURZH gouel ar brezhoneg - 1988 - E KARAEZ -

21 - 25 A VIZ MEURZH 9vet Gouel ar Film Keltiek e bro GEMBRE-

26 A VIZ MEURZH Bodadeg Veur ar c'h-CUAB - str. Harrouys-NAONED

2 - 3 A VIZ EBREL Kan ar Bobl en Oriant -

4 - 8 A VIZ EBREL Kendalc'h Keltiek e KERNEV-VEUR (Towan)

7 - 10 A VIZ EBREL "EUROSKOL" 10vet deiz-ha-bloaz Diwan-BREST

27 A VIZ MEZHEVEN - 17 A VIZ GOURE "festival des Arts Traditionnels" e NAONED.

PRIZONIDI BOLITIKEL
Skrivet da Felice TOMASI, prizoniad politikel korsikat BP 34 50270 Plañvour. 5 bloaz zo emañ en toull-bac'h ha n'eo ket bet barnet c'hoazh! Setu penaos e vez doujet da wirioù Mab-Den gant ar vro a embann bout samm dezho!

STAJOU WAR AN URZHIATAEREZH

35000 Roazon - Da gaout titouroù skrivet da: OSCR -X2000 -Pôla Central -6 bali ar re Unanet -35043 Roazon Cedex -pell :99-35.11.11.

STAJOU

DEVEZH STUDI
E SKOL VEUR ROAZON
SADORN 27 A VIZ C'HWEVRER

Un devezh-studi a vo graet e Skol Veur Roazon d'ar Sadorn 27 a viz C'hwevrer. Er sal 417, savadur D, er Gervenn Gelliek en em vodo an dud -Pouezus eo sevel ur greizenn enklask kreñ hag efedus e Skol Veur Breizh Uhel, hag an devezhioù-studi-se a c'hall bezañ ur broud da luskañ an enklaskerezh. Bez e c'hallont bezañ ivez digarez da gendivizout ha d'en em geneliañ.

Sed ase petra a vo da dañva en deiz-se: Sosio-yezhoñiezh gant Rita WILLIAMS - stad ar C'hembraeg en deiz a hiziv - Sturyezhoñiezh gant Eamon O'CIÓ -SAIN - Normalizadur an Iwerzhon - Yezhadur gant J. Yves URIEN - Valeurs syntaxiques de la conjonction HAG (-a-verbte). Erude en Léonais littéraire. - Lemnegezh gant Christian BRUNEL - le théâtre de Kerjean -

Ur c'hendiviz a vo goude pep pennad-kaoz. Hanter e brezhon, hanter e galleg e vo an devezh-studi eta.


P.Denez - L. Kergoat - YB Piriou
SKOL VEUR BREIZH UHEL - avenue Gaston Berger - Keryann -Roazon

BEAJOU STUDI E MINORELEZHIOU EUROPA

E giz bep bloaz e kinnig Burev Europa ar Yezhoù Bihannaet bejaoù-studi e minorelezhioù Europa. Setu amañ da heul roll ar bejaoù evit ar bloavezh 1988/89.

OKITANIA (stad Italia) 16-22 a viz Here 1988.
BREIZH 13-19 a viz Du 1988.
FRIZ (stad Broioù-Izel) 27 a viz Du - 3 a viz Kerzu 1988.
LUKSEMBOURG 22-28 a viz Genver 1989.
IWERZHON (Dulenn ha Gaeltacht Kora-mara) 5-11 a viz Meurzh 89.
BRO-SKOS 16-22 a viz Ebrél 1989
GALISIA 11- 17 a viz Even 1989.

Yalc'hadoù a vez roet d'an dud evit mont d'ober ur veaj. Goulenit resisadurioù hag an doserioù-enskrivañ digant : KOMITE BREIZH BUREV EUROPA - 16, rue Paul Brossat - 29000 -KEMPER-



28 a viz Meurzh-2 a viz Ebrél: staj anavezout gwelloc'h Breizh (aozet gant STUMDI)*
04-06 a viz Ebrél devezhioù-stummañ arimatourier kampouhañ.
04-06 a viz Ebrél Devezhioù-stummañ kelennerien brezhonég.
11-16 a viz Ebrél staj brezhonég (an holl liveoù)*
12-15 a viz Mae staj brezhonég (an holl liveoù)*
12-15 a viz Mae Beaj da Gernevur.
22-23 a viz Mae Baleadenn e bro ar C'hap.

02-03 a viz Gouere dibenn-sizhun bageal war ul lestr giz kozh evit krennarded (12-15 vl)
02-09 a viz Gouere kamp divyezhek evit ar vugale (6-12)*
10-16 a viz Gouere staj brezhonég (an holl liveoù)*
10-16 a viz Gouere staj c'hoariva ha brezhonég kozhet.
10-16 a viz Gouere staj Natur ha brezhonég.
16-24 a viz Gouere merdeadenn war ul lestr giz-kozh.
17-30 a viz Gouere kamp holl-vrezhonek evit ar vugale (6-12)

01-10 a viz EOST kamp etrevroadel evit yaouankizoù Europa (*)
02-14 a viz Eost kamp holl-vrezhonek evit krennarded (12-15 vl)
15-30 a viz Eost kamp holl-vrezhonek evit ar vugale (6-12 vl)

31 a viz Here-5 a viz Du staj brezhonég evit krennarded (12-15 vloaz)*
11-13 a viz Du staj brezhonég (an holl liveoù)*
E brezhonég penn da benn e vo dalc'het ar stajoù, nemet ar re merket gant ur steredenig. Evit kaout muioù-ha ziskleriadurioù skrivit pe bellgomz d'an :
OALED - Treglonou - 98.04.07.04
Prizioù : devezh a-bezh 105 lur

Kelennerien Brezhonég em Deskadurezh Publik e Pariz zo : ur gevredigezh savet e 1982 evit difenn ha kas war-raok ar brezhonég en deskadurezh publik, e miz Genver 1988, ur skipailh a 15 kelenner (kelenelioù en Deskadurezh stad, stajoù...).

Lille : 26-27 a viz Meurzh 16-17 a viz Ebrél, 30/04 -16 a viz Mae : 300 lur.

Brussels 12-13 Meurzh, 23-24 Ebrél, 14-15 Mae : 2500 L.B.

Beajoù e Breizh e-barzh tiegezhioù brezhonegerien (5 teiz Pask 1988, 3 eur kelenelioù an deiz).

Stajoù kembraeg e Pariz 12/13 Meurzh, 23/24 Ebrél ha dibennoù-sizhun e Mae 1988, stajoù kernoweg hag iwerzhonég.

KBPD zo dreist-holl : ar youl da velet ar brezhonég chom ur yezh veur, ar stourm evit ar frankiz da geñenn ha da studiañ
KBPD 13 bis rue Garibaldi 93400 Saint Ouen - Pgz 40.11.59.57-

PROFOU DA VREMAN
DU-KERZU-GENVER

Philippe Gillo 80 l, Louis Bellec 30 l, Dominique Allain 100 lur, Renée Frappin 30 l, Roman an Henaff 30 l, Robert Carre 30 lur, Laurent Glaziou 30 l, André Lavanant 80 l, Alan Heusaff 45 lur, Michel Manac'h 30 l, Hubert Guillers 30 l, Michel Berthoullou 39 l, Gireg Konan 80 l, Loeiz Bihannic 30 l, Yvette Rouille 30 l, J.Jacques Tilly 30 l, Stefaan Oplinus 30 l, Iwan Gwegan 30 l, Erwan ar Gall 30 l, Patrick Girard 30 l, Jo Bernard 30 l, Yann Moulég 50 l, Noel Peyr 80 l, Herve Masson 380 l, Renaud Quiniou 30 l, Jean Folléou 30 lur, Robert Thebault 30 l, Jean Raymond 30 l, J.P. Quelvenec 40 l, Y.F. Kerneis 40 l, Roger Bizez 40 l, J.F. Burlot 80 l, François Louis 180 l, Erwan Valérie 380 l, Claude Lancheo 30 lur, Pierre Le Saux 20 l, Ivona Marzin 30 l, Gerard Baillet 30, Michel Lescop 30 l, Yves Guillou 80 l, Viviana Ouilhou 30 l, Pa-drig Andreu 40 l, Mikael Bertin 80 l, Frank Baron 180 lur. ■

En holl : 2814 lur
Trugarez vras d'hol lennerien e-vit o skozell. Gant na gendalc'hec'h da sikour Bremañ, e teuio hi er-maez ingal bep miz.

E BOURZH AL LESTR-SPLUZ
"HERE RUZ", E TOUEZ
AR FUZENNOÙ NUKLEEL...



HA TE, TOVARITCH, PELECH E
TLEES KOUZHAN, MEVEZ AL RANNEZ




WAR BARIZ HAG
AR BANNLEV



HATE ?
WAR LILLE -
ROUBAIX - TOURNAI



HA TE TOVARITCHIG ?



BEN, ME' VO EVIT
KERGRIST - MDÉLOU, MET
DIWALLIT, PADTRED
ME'ZO LIES PENN...



NESPONT NIVERENN 76 - MIZ GENVER

1	F	L	E	U	R	E	N	N	M
2	L	I	V	R	I	N	U	O	
3	E	D	Z	E	P	E	L	I	N
4	U	P	E	L	D	N	T		
5	T	O	U	T	R	E	A	L	
6	A	N	E	Z	D	A	V		
7	A	Z	I	A	H	A	Z	E	
8	Z	S	L	I	E	N	N		
9	E	S	A	E	A	M	E	N	
10	N	N	U	N	D	A	R		

- GERIOU KROAZ MIZ C'HWEVRER 1988**
- A-LED
1. Ribler
 2. Tremenet - Dibenn - Div c'hoar
 3. Erer - Emgann
 4. Strollad Rock - Dañser
 5. Kuvvaet
 6. Gwiniz - Liammañ
 7. Bored - Din
 8. Strollad kuzh gouennelieren - Lart

- A-SERZH
- I. Koadec'h
 - II. Kus bezañ - Ma
 - III. Dour livet
 - IV. Leun a startijenn
 - V. Rakger - Ger-mell
 - VI. Gwelloc'h heolel
 - VII. Steredenn
 - VIII. Hent strizh - 'Lavar
 - IX. Berradur war al lizheron - Niver

I II III IV V VI VII VIII IX

1								
2								
3								
4								
5								
6								
7								
8								

BREMAN NIVERENN 77 -TAOLENN- MIZ C'HWEVRER 1988

LIZHIRI.....	2
GOUEL KARAEZ.....	3
TOULL.....	4
LANV DU.....	5
KLENVED AL LABOUR DOUAR	6
KREIZ-BREIZH.....	7
SAVERIEN-MOC'H.....	8
S.A.B.....	8
DAEL SKOL AN EMSAV....	9
KANT VLOAZ ESPERANTEG.	10
E.T.A.....	11
AFRIKA AR SU.....	12
KELETER.....	13
YEC'HED DA YAKARI.....	14
LEVRIOU BREMAN.....	15
DEIZ MEURLADEZ.....	16
KEMENNADENNOU.....	17
STAJOU.....	18
DUDI.....	19
MESK-DIVESK.....	20

PENNADOU GANT Yann Leskil -dri, Gwenole Bihannic, Yann Pennhaeg, J.K., MK, Gwenael Caradec, Iwan Kareded, F. Louis, Lukian Kergoat, T.L., Garan ar Meur, A.V.C. .

LUC'HSKEUDENNOU GANT Reuter, O.F., Teleg., AV.C., L.Kergoat.

TRESADENNOU GANT Mikael Baudu, Ar Floc'h, Nono, Hergé.

MAKETENN GANT Jil Killevere, Nolwenn Louarn, Mikael Baudu, Dominig Jolivet, Lena Louarn.

Skoazell Noella Olier

Rener ar gazetenn M.BAUDU

MOULET E TI AN O.S.C.R.

Koumanant bloaz 120 lur
SKOAZELL adalek 150 lur
Estren-vro : 150 lur.

SKRIVIT E-BARZH BREMAN !!
Kasit deomp HO PENNADOU,
KELETER, KEMENNADENNOU a-raok ar 5 a viz Meurzh

MESK DIVESK



Da vare Nedeleg ha Deiz Kentañ ar bloaz, n'eo ket poltrejoù ar re gozh a vank en hor c'helaouennoù pemdeziek : ar c'huzul kêr hag ar maer o kas bleunioù d'an hini koshañ pe d'an goshañ er barrez ; klub an 3de oad o lazkanaf dirak o c'henseurted, ar vugale o weladenniñ un ti-ar-re-gozh bennak, ar re all o werrenañ en-dro d'ur wezenn Nedeleg...

Bep bloaz e talvez ar re war an oad kement ha klinkadur ar gouelioù. Met echu evit ur prantad mat : ar re gozh a zo bet bac'het adarre, pellaet diouzh pep buhez ; ha kalz anezho badaouet en H.P. (ospitalioù ar re sod) a zo un drederenn eus o foblañs tud kozh...

Eti Philips en Izelvroioù e vez klasket ha ne vezit ket klañv gant ar SIDA a-raok bezañ implijet. E Rouen, warlene, e oa c'hoarvezet d'ur vaouez 35 bloaz bezañ skarzhet diouzh ul labouradeg abalamour ma oa taget gant ar c'hriagn-bev. E 1981, e Kemper, e oa bet skarzhet diouzh he labour ur vaouez deuet da vezañ re dev : gwir eo e oa implijet gant "Weight Watcher".

Dont a ra menozioù don gant renerien ar bed, menozioù

Setu ar pezh a ginnige "skiantourien" evit adsevel o bro, o broad, o gouenn e penn kentañ ar c'hantved. Ar re baour, n'eus forzh penaos, a zo tud koustus evit ar gevredigezh. Kalz a studia-dennoù a veze skrivet er marese diwar-benn rumadoù familh. Gwezenn ar gerentiezh evit ar familh Jukes, da skouer, a oa bet kontet 709 a dud enni, dindan 5 pe 6 rummad : 18 den o doa dalc'het un ti evit gisti -128 anezho a oa bet gisti ; -66 muntreien ; -200 a vevas er baourentez. Ar pezh a gousta

War-dro 350 micherour divroet dre guzh eus bro-Bortugal a zo bet kavet war chanterioù bro-Bariz abaoe bloaz. Kalz anezho a veze o labourat evit an SNCF, war linennoù an T.G.V.

Meur a embregerezh a oa kazell-ha-kazell evit pourchas, lojañ, bouetañ an dud-se, ken ez eo diaes kas an dud kiriek dirak al Lezvarn. Un dra a zo sur memestra (Le Monde- 18 a viz Kerzu 87), ne veze ket paeet ar Bortugaliz kalz mui-

ha n'int ket gwall nevez. E 1919 e kinnige ur c'helenner bras, Charles RICHET, e vefe kaset ar re gamm, ar re dort, ar re disterik d'an enezennoù pell evel Kreta, Filipinez ; hag e vefe difennet ouzh ar re glañv gant an droug-skevent pe an naplez, ar re mac'hagnet pe kabac'haet, ar re wan ha lezirek, an dud re vras pe re hir, hag all... e vefe difennet outo dimeziñ ha sevel krouadurien nevez (e-barzh : La Sélection Humaine 1919).

1,3 milion a z-dollar d'ar Stad Amerikan...

En doare skiantel eta e c'heller displegañ e vez doñje-rus hag arvarus evit an holl koulz ar re gozh, hag ar re glañv, koulz ar vezverien hag ar re gozh. Peadra da brientiñ dezho un tamm marv dizrouk. E 1918, e kinnige dija armezeg BINET e vefe un ensavadur karget da vougañ an holl re-se gant un aezenn-c'hoarzataer. Pa vo Le Pen ministr ar Yec'hed, sur e vo embannet kalz a studiadennoù a-seurt-se.

oc'h eget 2000 lur ar miz, hag unan eus chantieroù SNCF a oa dalc'het gant BOUYGHES.

Ne vank ket ijin gant ar paotr-mañ hag e genseurted evit gounid o zamm bara pemdeziek ; ha ma 'z eo ken efedus ar Bortugaliz gant al labour-dorn war ar chanterioù, ne zlefe ket bezañ kalz startoc'h al labour-mouezh, al labour-spered hag al labour-revr en tele. Ur wech bennak emichañs, e vo implijet Portugaliz 2000 lur (an tamm) e-lec'h an istrogelled milionoù (an tamm) war skramm T.F.1.



Emichañs ho peus bet tro da welet skritell bruderezh diwezhañ OLIDA : kig-moc'h, morzhed-hoc'h a vez meulet warni.

Emañ ar vaouez o troc'hañ jelkennoù gant ur gontell vras, un tamm kig dirazi, dirak he bruched kentoc'h, kement ha ken bihan ma n'ouzer ket petra emañ o -kinnig, ar flegenn pe he bronn. Ma fell d'ar plac'h-se gwerzhañ tammoù morzhed-hoc'h e raio tro-wenn, sur : n'eus ket den gant ar c'hoant bezañ dibennet pe spazhet en ur zenañ bronnoù kig a-seurt gant an hini-se !

N'eus ket pell zo e oa bet kinniget un abadenn gant A2 diwar ar c'hemmevelezh. Desket em eus evel-se e vefe paotred gant ar c'hoant bezañ merc'hed, ha merc'hed c'hoant gante bezañ paotred, abaoe o c'hanedigezh ; mezeged ha "skiantourien" all a oa prest da oberiatañ anezho evit respont d'o goulennoù dreist-holl (evurusamant n'eus hini ebet a sav c'hoant dezhañ bezañ ki pe gzh...).

Pet a dud gant ar c'hoant -se ? Unan diwar 50 000 marteze, emeve ur mezeg bras, d.l.e. war-dro 1000 nemetken e Bro-C'hall.

Evit ken nebeut a dud e sav A2 un abadenn vras e-pad 4 eurvezh. Ar vrezhonegerien, a zo 500 000 anezho, o devez milboan bezañ klevet gant ar mediaoù bras. Ma tivizfemp holl kemm reizh, e rafe trouz e Paris marteze ? ■

GARAN AR MEUR

bremañ